


GOUEL AR REPUBLIK

181/2



beurdeur de lais le vachille laund laud

oijtjeleit te nade medes nissee am mire

oijtjeleit te nade medes nissee am mire

VAR DON: *Gwerz ann otro Lay PE TON : Kelven.*

Barz ar blavez seitek-kant nao ha pevar ugent,
D'ar Barzeg a viz Goüeren, vel eur bobl diskient,
Tud enn Pariz a dilamp, ho lagad a lugern,
Gant terjen vraz ann distruij, gant terjen ann ifern.

Mignoned ar Republik d'ann dud ma a lere
Na vije biken 'vit-he na peuc'h na liberte
Keit ha ma vije gwelet rouane war ann trôn
Hag ar gwir citoianed chadenned er prizon.

Diskueed ho deuz d'ar bobl enn Pariz eur c'hastel
Ar Bastill oa he hano, eur c'hastel a vrezel.
Ma ve, eme ann dud fall, ar Bastill distrujed
Ken evid oc'h a brizon, mes liberte bepred.

Er c'hastel ze oa o chom ar Zoudarded oajed,
Hag enô tud a dizurz oa ive dastumed ;
Mez ar re ma n'oant ked oll ziouaz er chadenned
D'al laer dister ar prizon, d'al laer braz Enorio.

Lared a zo d'ar bobl ze eo ar c'hastel karged
A vignoned gwal gaset gant kalz a zoudarded.
Eno na oa koulskoude 'met kant parzek zoudard
Evit difen ar c'hastel hag enn-han ober gward.

Ha c'hoaz e-touez ar re ma a oa pevar-ugent
Achu gant-he ho zervij, armo ken na zougent,
Er Bastill e oant lojed, nan evel zoudarded
Mez vid ho zrugarekâd euz ar vad ho doa gred.

Seiz den oa, seiz den epken, ebarz ar prizonnio,
Pevar an-he dastumed evid ho fals skrijo,
Daou all a oa digoueed trelated ho spered,
Evel bugel didalve oa enô ar seisved.

Vit sikour hevelep tud, evel eur barr avel,
Ar Barizianed a red eneb ar c'hos-kastel :
Goulen a reont kerkenit gant meûr a drouk peden
Ma vo digored ann or pe a lampo zouden.

Mes kabiten ar c'hastel, de Launay he hano,
'Neus -respountet hep krena ma ve red e varvo ;
Ar Roue 'n he lealder ar c'hastel 'neus fied
Hag arok ma tigoro, ar Roue 'no komzed.

Mes ar bobl mezevenned a ro skouarn vouzard,
Ha da betra koms d' chi eus never eur zoudard ?
Klask a ra eun dra epken : bea Roue d' he zro
Ha neb a stourmo out-hi vo barnet d'ar maro.

Mes kaer 'n euz ar bobl c'hoari evit diskar ann or,
Ann or a chom enn he zao enn despet d'he fulor.
ENN keit se ar c'habiten gant kannolio helle
Lakâd ar bobl da zouza ha skuba ar pave.

De Launay gar he never, mez ive he nessa,
Evit harz eus muntrerez e layar d'ann dud ma :
Ann or a vo digored, ma kered, eme-han,
Lezel ar vue, ar peuc'h, gant kement zo ama.

« Oh ia, ia, eme ar bobl, gret yo vel ma leret,
Prim digoret d'imb ann or, c'houi oll vo esperned. »
Ha kerkent ar c'habiten, re fiuz 'n ho c'homjo
Ha disken d'ho digemer beteg ann orejo.

Mes mignonned, tud a boan, d'ac'h hu me ziskleri,
Biken n'ho pezo zikour digant tud a dourni.
Neb a brezeg ann disurz na glask bepred enn-han
Nemed he vad he-unan 'n eur waska he nessan.

A vec'h erru er c'hastel, e kollond ann evor
Deuz ar gir ho doa roed ha deuz mouez ann enor :
Zellet vel ma tilampont var ar gos soudarded
Gaut kement a gassoni ha bleidi var denved.

Ann dud ma zo 'n em vreved evit difen ho bro
Ha brema ho brech dinerz n'hell ken dougen armo :
Kementse na dalvé man dirak tud dridue
Skoed ind hag ad-skoed bete koll ho bue,

De Launay a ziskoueaz madelez d'ann dud se,
Brema e lampont d'ehan vit kavoud he vue ;
Gant kontel vraz eur c'higer he benn a zo troc'hed.
Ha var bizied eur forc'h ar penn ze zo stigned.

Euz en kleved, ar bobl ze d'ar prison na rede
Nemet vit renti kentoc'h d'he vreuder liberte ;
Ze na oa met digare, rag ar brizonierien
Zo lezed enn ho frizon da grignad ho chaden

Hag ar revolution a reas prest goude

D'ann oll dud honest en Franz eur brezel didrue

Mil ha mil den oe barnet da c'houzanv ar maro

Ha na oa d'he tamallet nemed ho vertuio.

Penn de Launay o wada dre Bariz zo douged :

Pebez banniel, ma Doue, euzuz eo da weled,

Ha coulscoude ar bleidi var he lerc'h a arraj,

Mezevennet gand ar goad, al luxur, ann evaj :

Dre ma valeont dre Pariz o kevont konsorted

Kement hag hi didrue ha d'ann diaoul gwersed.

Mez var ho hent e tigoue eun den n'eus ked aon

He vizaj a ziskleri ann euz zo 'n he galon

Lampad a rer war 'n ehan d'he dro eo dibenned,

He benn fromus da weled war eur pik zo stigned.

Ha seiz de goude, tud vad, enn Pariz adarre,

Enn hano al liberte, a renk koll ho bue.

Er mare ze enn Pariz, e tuont d'ar re ma

Nag a dud vad oe lac'hed, n'hallan ked en kounta.

Eur zon na ve ked awalc'h, eul levr ve re dister

Euza raffe ma fluen ma klaskfen en ober.

Eun den, a oa d'ar c'houls se enn Pariz o vevan

A lere divezatoc'h e krede mad gant han

Gueled ar fe hag ann urz da viken disvantred

Gant tud koueed izeloc'h vit bleidi ha tigred.

Rag al loen ar muia gwe, debred awalc'h gant han,

A deu da vea jentil en kever he nessan,

Elec'h ann dud a disurz eur wech skuilled ar goad,

A garfe gweled ar goad dre oll skuilled dalch mad.

Ha goude kazi kant vla, me wel adarre Frans
Skuiz o lakâd enn Doue he fe hag he fians,
Me a wel ziouaz em bro Doue hag ar werchez
Gand ar paour hag ar pinvik barned d'ar goapérez

Gweach all, o ma Jésus, gant zul ar zakramant,
Hon mestro, braz ha bian, hoc'h adore kontant
Brema e souzond a-dren, mezeg hag aouennik.
N'oc'h ked eta, ma Jezus, Doue, ar Republik !

Ha pa deue hanter eost, kaera gouel ar verc'hez,
A vije gret gouel hon bro gant joa ha levenez,
Impalaër ha zujidi, zoudardet, barnérien,
Oll e teuent d'enori mam vad ar gristenien.

Hon mestro neve a lar, evel tud heretik,
Ken 'vo Doue ha gwerc'hez ! ha viv' ar Republik !
Skuiz int gant lezen Doue, na c'houlont ken zoken
A ve lared he hano d'ar vugale gristen.

Ar mestro a zo dife, dife vo ho gouelio
Evid ann derved beaj ec'h imbanner d'ar vro :
Dar Barzek a viz Goueren e tle peb den enn Franz
ENN enor d'ar Republik ober trouz, ha bombanz.

Ar republik 'deus choazed evid he de a woel
Ann de fromuz a welaz ann urz vad o vranskelt
Ann dud honest distrujed hag ar gwir Fransijen
Evel keilien o kouea lac'het gant muntrerien.

Oh ! ia muntrerien a oant ha muntrerien hudur
O lac'ha gwir Fransijen hep droet, dre blijadur
Lezen Doue da gentan, kerkouls lezen ho bro
A tlefoa hep damanti ho c'hondaon d'ar maro.

Ar republik ho c'hémer da batroned d'hon bro
Hag a lar, enn enor d'he, displega drapoio
Hon mestro ha c'hoant ho deus da weled a nevez
Ann dud honest dindan dreid muntrerien didalve ?

Hag ouspen ze, er bla man, gand eun oer digempen,
D'ann oll vaerio ar ministr 'n eus roet gourc'hemen
Da wiska gant drapoio diavez ann ilizo
Ha d'ober zon ar c'hleier barz ann oll barrozo.

Felloud a ra d'he lakad iliz ar gristenien
Da rei ive meulodi d'ar falla muntrerien :
Mezuz ve kleved eur c'hloc'h o rei distera zon
ENN enor d'ar republik 'met glaz ann anaon.

Ha brema, ma mignonned, m' ho ped, leret d'in me
Ar vad e kontet tenna euz ar gouel dizak ze ?
ENN de ze, c'houi a c'hoerzo, c'houi vez dilabour
Ha pa deui ann de var lerc'h c'houi vez muioc'h paour.

Hag en ar c'hirk-vourc'hijen, neb a brezeg ar gouel
A lezo gand ar merer he garter Gour-Mikel ?
En kredi ve tromplezon ; red a vo d'ar merer,
Goude sikour euz ar gouel, pean c'hoaz peb karter

D'ar barzek, ma mignonned, zelled ann drapoio,
Tremened ive ho noz euz skeud ar Goloi
Pa deuio ar percepteur neuze ec'h anvefed
Ho pezo difreied gouel ar republikaned.

Ma enored ar gouel ma, Doue ho kastio
Hag ar republicaned var ho koust a c'houerzo
C'houarzin a rint o weled tud hag a zo kristen
O koll amzer hag arc'hant d'enori muntrerien.

Mez ma kered ma c'hredi, c'houi epken a c'houerzo
Hag ar republicaned gand ar vez a ruio :
D'ar barzek, chomed er gear ha leret d'ar re man
Na c'houlet ked euz eur gouel na ve Doue enn-han.

Hon mestro na c'houlont ken euz hon religion
Gwel eo gant-he enori muntrerien digalon :
Red eo d'imp rei hon arc'hant p'en goulen al lezen,
Miromp da viana hon fe, hon inor a gristen.

EUR BARZIK KOS SOUDARD.

Ma s'illony, koy eys en bouys in as ople euu-pun
D. en pikket, gromed er leut pe jout q'ar le wod
Had in lebpuisseng baug te h'as a laud
Ma's illony, koy eys en bouys in as ople euu-pun

Hou mochte us c'giontuyken enk-toni tellefion
G'wes! so d'wys - ne g'wys! multeieren di' sjen
Rey es so d'wys lei joun sic'gaal b'en bouys in lezen
M'lioud es ains por le, joun jnor a bouys

ENH BARZIK ROE SONDABRO